

(306)

Var Maro
An Autrou Le Gonidec,
Ar gwella gwiziek el langach Brezonec.

Va c'halon zo digec'het, va zeod stag ouz va staon,
Ne red em speret nemet sonjesonou a gaon :
Hon Mestr, sioaz ! zo er bez.... Ra deuzo an douar
Da veza skanv d'e gorf paour, mar emâ e pouar.
Ne ma mui hor c'henvroad, an Autrou Gonidec,
Pini voa ker gwiziek el langach brezonec !...

An daouzek aris here e rente e ene,
Goude pemp mis a gourzav, etre daouarn Doue.
Nebeut voa anavezet gant ar bobl eus hor bro ;
Hogen tud gwiziek a Vreiz en e lakas ato
Etoez ar re brudeta dre o speret huel,
Hac e goll a c'hlac'haro hac a dost hac a bell.

(307)

Da vêred eus a Vontmartre, er gêr eus a Paris,
Ar c'haon en deus en heuillet gant kalz e genvrois :
An Autrou Brizeux var bez an Autrou Gonidec
En deus grêt ar melodi a dad ar Brezonec.

En eur rentâ d'an douar eme e wir rignon,
An Autrou Brizeux neuze, glac'haret e galon,
A deu, en eur hirvoudi, ha gant ur vouez tener,
Da brononç ar c'homzou - mâ var bez ar Breiziad ker :
„ Ra deuz hor brô ker a Vreiz da glêret hor c'heuziou,
„ Var ar c'holl bras ra hirio, a fraill hor c'halonou :
„ Unan demeus an noplâ a douez e bugale
„ A renkomp, sioaz ! hirio, gwelet disken er be !...
„ Betek an deiz a iremâ n'en doe brassoc'h souci
„ Nemet skrifa evit Breiz ha beva evit.
„ Nan, biskoas ne voe gwelet, an oll en lavaro,
„ Un den ker gwiziek hac én en langach e vamm-bro.
„ Kenvroiz Autrou Gonidec, c'houi a anav errvad
„ Petra voe e oad kentâ : oll e voe deread.
„ Ganet voa e Conc-Leon, hac e kuitas ar gêr
„ Evit ober e studi e skolach Landreger.

436

„ D'an sad eus a zeitek vloas, er revolution,
 „ En amzer eus a drubuil, a hirvoud, a spouron, (308)
 „ Voe kunduet d'ar chaffot vit beza dibennet;
 „ Hogen vel dre ur mirael voe neuze savet.
 „ Mesket goude er triagarz, nespel d'e zantimant,
 „ Hontraign da vont d'en em goach, gwisket vel ur payzant,
 „ En em lakas da zeski eus hor bro al langach,
 „ Pehini a gozee en e rugaleach.
 „ Hak adalek an deiz-se e voe bepret c'hoantek
 „ Da scrifa meurbed reizus hon langach brezonec.
 „ En oll blaçou a zalc'has n'en devoa nep repos,
 „ Brepret eus ar Brezonek vev occupet deiz-nos.
 „ Ha ni lezo e gorf paour amañ, pell deus e vro?
 „ Oh! nan.... Ni oll, Bretonet, gant soign a gemero
 „ Ar voyen ma vo rentet en e gêr Conc - Leon,
 „ Vit ma vo darempredet atao gant peb Breton.
 „ Reketomp ma vo savet kerkent eno neuze
 „ Eur Men-Hir, evit diskeus pelec'h evo ere;
 „ Peb Breiziad a dle caout c'hoant da vont, eus e voyen,
 „ Da zikour sevel ur bez da un hevelep den.
 „ Ra deuzo ar Bretonet da gompren o dever,
 „ Ha ni, diskibien leal d'eur c'henvroad ken ker,
 „ Promettomp oll assambles, var ar bez-mañ stouet,
 „ Biken hano Gonidec na vo ankounac'het.»
 C'houi, e vignonet yaouank, oc'h eus bet an eür - vad
 Deus an Autrou Gonidec alies da dostat,
 Autroñez a Vilmarze, ha c'houi breudeur Courcy,
 De Léséleuc ha Brizeux, ha c'hoas meur a hini.
 Kuntinuit da scrifa var hor bro ger a Vreiz;
 Oll ezoc'h dispozet mad d'en ober gant calz reiz:
 Eur servich eus ar vrassa a rentoc'h d'hor mam - bro,
 Hac eur blizadur meurbed da guement ho lenno.
 Meskit ivez ho taelou gant hon re, va breudeur,
 C'houi pere, pell diouzomp, zo o chom e Breiz-Veur;
 Rentit hommach da Vemor an Autrou Gonidec,
 Pini veldoc'h a garric hon langach Brezonec.

(309)

Eur Breiziad.

25 here 1838.

A. Lédan.

(Vol. IV, p. 306 - 309)
 ainsi transcrites et non numérotées.